

(477, suite)

Imitation eus a Petrarq,
Erit Voclus, Carnoët, Laura hac Anneic. — Var ay ton gallec.

A Garmoët pa zeo partiet mignon Annaic da vigen,
Ar vreo oll a zo bet clêvet oi'h eclati evellen:
Adieu, test eus va c'harante, canton eurus, bro charmant,
En pehini, bete vrēman, va c'halon zo bet contant.

(478)

En eur respont d'am oll glēmou e zeo c'houi a neus disget
An nec'hamant, ay tourmanchoù eus ur galon contristet.
Na ancouet get al langach-mañ, na mar deu bigen Annet
Da vouëla var ay dachen-mañ, va mouez dezji repetet.

Leret dei penos he charmon a occup va oll speret;
Tout dei penos he fazou em daëlou a zo trempet:
Va mouez na gano nemeti, hac em memor e vezo
E quis ur mellezour em zi, en pehini m'e guelo.

Leret dei penos ar Graçou, Venus hac he Mab mignon
A varchefe var va faziou na gonsolfent get va c'halon;
D'o eloquanç ha d'o guenet e respontfen em glac'har:
Rentit Annet, pe va daëlou a c'hlebio c'hoas ay douar.

Hac mar bez ret din coll Annet, ma n'e quelan mui bigen,
Goude va eperanç collet e renquin mervel souden

(Vol. II, p. 477-478 ; restée inachevée).
Les 5 st. sont numérotés.)